

EN HANO AN TAD, AR MAP HAC AR SPERET-SANTEL



MEMOR

EUS AR RETRED AM BEUZ GREAT

E LESNEVEN ER BLOAS 1874



Mil bennoz da Zoue da veza henchet ac'hannon d'ar retred-ze evel a bouez an-dourn. Beteg ar mare-ze, siouas din! me a ioa ken disoursi ha tra gant affer va silvidiguez. Sonj ebet an oll em bije eun ene da zavetei, eur barados da c'hounid, nac eun ibern da zouja, touellet ma z'oan gant madou, enoriou, plijaduresiou ar bed. Mes, a drugare Doue, e doug ar retred euz-ze em beuz anavezet peguen aner, peguen didalvout eo an traou-ze oll e skoas madou an env ha mignonach va Zalver.

Rag-se ive em beuz great va zonch, hac a zevri, da lakat hiviziken em spered affer va zilvidiguez araog pep affer all. *Petra dal d'an den,*

eme an Aviel, *gounid ar bed-oll, ma teu da goll
he ene evit an eternite?*

Hag evel na ouffe, hep ar bedenn, beza evid-
oun savete ebed an oll, me am beuz goestlet da
Zoue beza aketus d'he bedi ha da lakaat he bedi
gant tud va zi, dioc'h mintin ha dioc'h noz,
araog ha goude ar pred, ha ken aketus all da
offr dezan va foan ha va labour, bep heur'n
amzer var an deiz. Poan gollet, labour gollet,
e leal, kement ne z'eo ket great evid Doue.

Goestlet em beuz ouspen-ze beza soursiuz da
vont da zelaou komzou Doue ha da ziuall na
vankfen morse dre va faot d'ar zervich divin,
dreist pep tra d'an deziou gourc'hemennet. Ho-
guen ar zul eo *deiz an Aotrou Doue*, ha malloz
d'an nep a implijo an deiz-se a enep he volonte.

Mes ar pez am beuz lakeat dounna tout em
spered eo beza aketus da dostaat oc'h va zacia-
manchou, bep daou, tri miz, pe liessoc'h, her-
vez ali va c'hovesour. Etre daou, ma c'hoarvesfe
ganen, Doue ra viró! koueza a nevez, koueza
eur vech hebken em pec'het mignon, eleac'h
ober ar gourd, eleac'h choum en-han da vor-
gousket evel a ziaraog, oh! neuze buan hac hep
dale pelloc'h, me a guerzo d'en em voalc'hi e
dour ar binijen. Rag *oc'h klenvejou an ene,*
remed ebed surroc'h eguet ar govesion.

E doug va retred Doue en deuz great din ar
c'hras da anaout va zech, ar pec'het milliguet-
ze a ve, hep mank ebed, kaoz euz va c'hollidi-
guez eternal ma na zeuan abenn d'he zisc'hri-
sienna.

(*Ama, da bep-unan guelet pehini eo he dech.*)

Hoguen : 1^o va zech din-me eo ar vesventi, ha n'emaoun ket en entremar ma z'eo calz es-soc'h din dioueret ar banne kenta eguet n'az eo dioueret an eil. Ac'hano ive, me am beuz goestlet keza bepret var evez, rag va enebour touet, *an odivi*, ha tec'het hiviziken dioc'h an ostaleriou ha darempred ar vesierien, o c'houzoud ervad, anez an dra-ze, ez oun sur ataó da veza diska-ret. Rag Doue ne ro morse he c'hras d'an nep a ia dre he faot d'en em deleur e kreiz an danjer.

2^o Me, a-vad, a zo bet touellet gant ar bed hac he blijaduresiou. Redeg ar foariou, ar pardoniou, riboulat an dansou, an nosveziou, kuzulat a gostez gant an hini a garien, klevet ha lavaret sotoniou ha diotachou, ia, setu eno va zech, setu eno gant petra eo bet atapiet oll va c'haloun ha va spered ; hac o veza karet an danjer, ez oun, siouas din ! koezet en-han kant ha kant guech em buez. Mes e doug va retred me am beuz goestlet tec'het hiviziken ha tec'het a-grenn dioc'h kement munut-mad a zo bet pen-kaoz din da sklabeza va ene paour ha da goll mignonach va Doue. Ia, guell e vezo ganen, evel m'az eo kemennet d'in gant an Aviel, *mont d'ar baradoz gant eul lagad hep-ken eguet na ve mont d'an ifern gant va daoulagad ho daou.*

3^o Me, siouas ! a zo bet pell amzer e ienien, e e kasoni oc'h va nessa hac em beuz goestlet he garet hiviziken evel ma tere oc'h guir gristenien, o c'houzoud ervad n'em beuz pardoun ebed da c'hortoz a berz Doue nemed pardouni a rafen da guenta hag a vir galoun.

4^o Me, d'am zro, a zo bet eur galoun arc'hant, me n'em beuz great nemet fripounerez em buez, rastellet em beuz va danvez a gleiz mui eguet a ziou, mes goestlet em beuz ive e doug va retred ober kement a zo em galloud evit rapari an oll gaou em beuz great, rag anez an dra-ze, savete ebed evid-oun adarre. Ar gourc'hemenn a zo ker sklear hac an deiz : *Miret madou den, gant guiziequez na ri biken.*

Hag a hend-all, pe seurt doare tech bennac a oufen da gaout, em beuz prometet mad ne espernign na poan, na treveil ken a vezin deuet a-benn d'he zisc'hrisienna var neat.

Ia, ar re-ze eo ar promessaou em beuz great, ne ket dre c'hinou re-all, mes dreiz-oun vanan ha gant anaoudeguez-vad; ne ket hepken e tribunal ar binijenn, e treid va c'hovesour, mes a vouez huel ha dirag an oll, hac em beuz roet va guer e vezin fidel dezo ha fidel beteg ar maro gant sicour an Aotrou Doue hac ar Verc'hez Vari.

Roet gant an Aotrou *Hily curé Plougastel*
evit m'ho pezo sonj anezan en ho pedennou. *Baroula*

GOULET HAG AOTRET :

Lesneven ar 6 a Vengolo 1867.

RENÉ, Escop Quemper ha Leon.